

ANNEXE

CONVENTION REDIGÉE EN LANGUE BRETONNE



OFIS PUBLIK

AR BREZHONEG

OFFICE PUBLIC

DE LA LANGUE BRETONNE

Kendivizad palioù hag araezioù

Kêr



saint-herblain

Etre

Kêr Sant-Ervlan dileuriet gant an aotrou Bertrand AFFILÉ, Maer, oc'h ober hervez un divizadeg eus Kuzul-kêr ar 24 a viz Mezheven 2024 en un tu,

hag

an DPKS « Ofis Publik ar Brezhoneg », zo e sez e Kastell Kerampuilh 29270 Karaez, dileuriet gant e Renner, Fulup JACQ, en tu all.

RAKLAVAR

E-barzh an obererezhioù sevenadurel e kas kêr Sant-Ervlan ur politikerezh evit diorren sevenadur Breizh hag an divyezhegezh brezhoneg-galleg.

Gant an diferad niv. 2009-050 d'an 3 a viz Ebrel 2009 e voe divizet gant ar C'huzul-kêr lakaat ar gumun da sinañ Karta Ya d'ar Brezhoneg, a vez kinniget gant an OPAB.

Ofis Publik ar Brezhoneg zo un diazezadur publik a genlabour sevenadurel anezhañ (DPKS). E bal zo termeniñ ha lakaat da dalvezout an oberoù da embreger evit kas war-raok ha diorren ar brezhoneg en holl dachennoù eus ar vuhez sokial ha foran.

E-barzh e gefridioù e ra an OPAB war-dro ar Greizenn dafar sevenadurel keltiek (KDSK) a zo e Sant-Ervlan, abaoe ar 1añ a viz Genver 2024. Er vediaoueg-se e vez kinniget e-tro 19 000 oberenn e brezhoneg hag e galleg evit an darn vrasañ anezho, a denn da Vreizh pe d'ar Broioù Keltiek. E-tro 400 a gelaouennoù hag a gazetenoù zo ivez e kreizenn an OPAB.

Kement-se displeget ez eus bet divizet kement-mañ :

Mellad 1 : Abeg ar c'hendivizad

Gant ar c'hendivizad-mañ e vez termenet an doareoù kenlabour etre an OPAB ha Kêr Sant-Ervlan evit a sell ouzh diorren ar brezhoneg ha sevenadur Breizh dre-vras, o lakaat e-kerz Santervlaniz teulioù an OPAB er gumun.

Mellad 2 : Paliou hag endalc'hiou

Kêr Sant-Ervlan a anavez an OPAB evit meur a garg, o vezañ un aozadur dave a-fet brezhoneg dreist-holl hag a-fet diorren an divyezhegezh dre-vras :

- Kuzulioù teknikel a-fet divyezhegezh
- Brudañ ar brezhoneg
- Titouriñ kerent ar skolidi a-ziwar ar c'helenn divyezhek
- Lakaat e kerz Santervlaniz teulioù an OPAB

O tiorren ar c'henlabour-mañ e labouro Kêr Sant-Ervlan hag an OPAB ivez da :

- Kas ur politikerezh sevenadur tost ouzh an dud ;

- Kreskiñ efedusted o dastumadoù,
- Kreskiñ ar c'hinnig teulioù evit tud ar gumun,
- Kenglokaat gwelloc'h an dalc'hadoù
- Ober ma vo aes kavout teulioù e brezhoneg

2.1 Palioù hag endalc'hoù Ofis Publik ar Brezhoneg

Gouestlañ a ra an OPAB :

- kemer perzh en emvodoù teknikel arbennik a-fet divyezhegezh
- kas d'an Ti-kêr titouroù diwar-benn ar brezhoneg, gant Arsellva implij ar yezhoù
- labourat a-gevret gant rouedad levraouegoù Kêr, o kinnig, e-touez traoù all :
 - kelaouiñ eo puilh an dalc'had dielloù ;
 - reiñ emgav da vichereien servijoù al Levraoueg evit kizidikaat da sevenadur Breizh hag ar yezhoù a ra anezhi ;
 - respont d'ar goulennoù titouroù,
 - treuzkas titouroù a denn d'an abadennoù a vez aozet gant al Levraoueg,
 - kemer perzh e Devezhioù ar glad.
 -

2.2 Palioù hag endalc'hoù Kêr Sant-Ervlan

Gouestlañ a ra Kêr Sant-Ervlan :

-harpañ an OPAB en e vont en-dro gant ur skoaziad mont en-dro bloaziek ;
 -aesat an darempredoù etre Ofis Publik ar Brezhoneg hag ar servijoù-kêr

-ober al liamm etre ar c'hoskor el Levraoueg evit eskemm gant koskor an OPAB diwar-benn doareoù akuizitañ pep framm, gant ar pal kenklokaat pep a zalc'had.

Mellad 3 : Barregezhioù hag oberoù

Hervez ar c'hefridoù deverket gant Kêr Sant-Ervlan d'al Levraoueg ha pal an OPAB, ez eus bet divizet e vefe roet an tu da implijerien pep levraoueg ober gant dalc'hadoù eben.

Gallout a raio an OPAB kemer perzh en obererezhioù zo, da skouer

- Aozañ ur penndevezh gweladennoù / abadennoù dizoleiñ ar greizenn deuliaouiñ evit michereien rouedad levraouegoù ar gumun,
- Kenlabourat evit abadennoù buheziñ diwar-benn sevenadur Breizh, al lennegezh pe a-ziwar un tem pe un oberour ;
- Prestiñ teulioù evit sevel diskouezadegoù.

3.1 Kenditouriñ an dud

Titouriñ a ra rouedad levraouegoù Kêr Sant-Ervlan hag an OPAB o lennerien eus an obererezhioù ha servijoù a ginnigont hag o doareoù. Al Levraoueg e Kêr Sant-Ervlan hag an OPAB a chom kelaouet eus o obererezhioù. Dasparzhañ a reont teulioù kehentiñ zo bet prietet gant an eil diazezadur pe egile. Kizidikaat a reont o c'hoskor d'ar servijoù a vez kinniget en diazezadur all, hag o doareoù.

Kelaouet e vez implijerien an daou lec'h eus ar programmoù abadennoù a vez kinniget gant unan pe egile.

Mellad 4 : Kemer perzh er mizoù gant Kêr Sant-Ervlan

Endalc'het eo ar gumun da harpañ oberoù an OPAB gant ur skoaziad, ha kement-mañ evit derc'hel da vont gant an hent-se.

Gant ma vo kredoù a-walc'h hag e vo resevet ar prouennoù kontouriezh a-fet arc'hant en un doare bloaziek, eo endalc'het Kêr da reiñ ur skoaziad mont en-dro bloaziek evit kas ar palioù hag an obererezhioù a vez termenet er c'hendivizad-mañ da benn.

A-benn ensellet ar goulenn skoaziad a vez graet bep bloaz gant servijoù Kêr e ranko an DPSK kinnig an teulioù-mañ :

- A-raok ar 1añ a viz Meurzh bep bloaz :
 - Ar rakweladoù a-fet budjed evit ar bloavezh keodedel o ren hervez ar reoladoù lakaet da dalvezout a-fet kontouriezh, en ur lakaat kemm etre ar c'hargoù frammadurel hag ar c'hargoù liammet ouzh ar programm oberoù ;
 - Bilañs ha kont disoc'h an embregvezh kent testeniekaet gwir, a vo kaset d'ar Maer.
- A-raok ar 1añ a viz Ebrel bep bloaz :
 - Ar rakprogramm oberoù hag an danevell obererezh.

Mellad 5 : Kontroll implij ar fontoù

Gwir zo gant Kêr Sant-Ervlan da lakaat gwiriañ kement tra na vefe ket diouzh an implij ha dasparzh ar fontoù ma vefe ezhomm hervezi.

Gallout a raio goulenn groñs e vefe daskoret ar fontoù dezhi ma ne vefe ket implijet diouzh statudoù, kefridioù ha palioù Ofis Publik ar Brezhoneg.

Mellad 6 : Priziañ

Gant Ofis Publik ar Brezhoneg e vo graet ur briziadenn bep bloaz war kalite ha niver al labourioù kaset da benn e stern ar c'hendivizad hag a vo kinniget da Gêr Sant-Ervlan.

Mellad 7 : Pad ar c'hendivizad

Ar c'hendivizad-mañ a vo lakaet da dalvezout adalek an deiziad ma vo sinet gant an daou siner. Skoulmet eo adalek an deiziad-se hag echuiñ a raio d'an 31 a viz Kerzu 2026.

Mellad 8 : Addiviz

Gant ma vo asantet gant an daou siner e c'hallo ar c'hendivizad-mañ bezañ kemmet dre addiviz.

Mellad 9 : Diskoulmañ

Ma ne vez ket doujet da unan eus hec'h endalc'hioù o tisoc'h eus ar c'hendivizad-mañ gant an eil pe egile eus an daou siner e c'hallo ar c'hendivizad-mañ bezañ diskoulmet dre wir leun gant ar siner all, gant ma vo doujet d'ur raktermen tri (3) miz goude ma vo kaset ul lizher erbedet gant kemenn degemen kantabeget evel m'eo dleet hag a redio anezhañ d'ober diouzh endalc'hioù ar gevrat a zo chomet difrouezh.

Mellad 10 : Renkañ an dizemglevioù

Ma vez dizemglev war an doare m'eo lakaet ar c'hendivizad-mañ da dalvezout, ha goude bezañ graet kement tra a c'haller ober evit renkañ an dizemglevioù-se dre gaer e vint kaset dirak lez-varn velestradurel Naoned.

Graet e Sant-Ervlan, d'an

**Evit Kêr Sant-Ervlan
Ar Maer
Bertrand AFFILÉ**



OFIS PUBLIK
AR BREZHONEG
OFFICE PUBLIC
DE LA LANGUE BRETONNE

**Ar Rener
Fulup JACQ**